

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù – Ronds et rondes simples

**An tenner dent**

Selaouit bremañ Bretoned, *Trala dirèno*  
Ur ganaouenn nevez savet, *Trala dira lonla, tra ladirèno*

Houmañ n'eo ket bet c'hoazh klevet,  
Met an ton zo anavezet.

An istor-mañ 'zo c'hoarvezet,  
Etre 'r C'heisker hag ar vered.

Un tenner dent a zo eno,  
Creignou 'gav din eo e anv.

Me oa ivez 'c'hedal va zro,  
Poan dent am boa 'baoe pell 'zo.

Ar C'hreignou a lavaras neuze :  
"Deus da sikour ac'hanon me".

Ar pabor-mañ war e gador,  
Ne zalc'h ket e c'henou digor.

Pa vo 'n durkez en e c'henou,  
Krog 'n e foñs gant da ivinoù".

A-zrek ar gador oan kuzhet,  
Egile 'n doa ket va gwelet.

Ha setu pa 'oa deuet ar poent,  
Me 'oa krog mort en e feskenn.

An dant, er meaz a zo deuet,  
Hag ar paour-kaezh, da lavaret :

"Biskoazh ne 'm bije bet soñjet  
Gwrizioù ken don en dije bet !".

*Yves JACOB 1949*